

I

STOR
AR PONSIN MELEN



ISTOR AR PONSIN MELEN

Kontet gant Chouchanick
Skeudenoù gant Luce Lagarde
Brezhoneg gant Tudual Huon

Ur paotrig blev melen ez eo Alanig hag a zo o vont da gaout pevar bloaz.

E dad, perc'henn an ti-feurm bravañ a zo e kêr Radeneg a-bezh en doa lavaret dezhañ un deiz:

— Alanig, da zeiz da bevar bloaz e roin dit ur vi. Mar bez ur yarig e chomo ganez. Mar bez ur c'hilhogig e vezo gwerzhet er marc'had.

Neuze, an deiz ma c'hwezh Alanig war e beder goulaouenn, ez a e dad gantañ da borzh ar yer da zibab ur vi.

38
Nec'het-bras eo Alanig. Pehini dibab ? Ar pezh mell vi melen pe ar vi bihan gwenn. A-benn ar fin e tibab ar pezh mell vi melen.

E dad a ra ur merk warnañ gant aon e vefe kemmesket gant ar re all. Tresañ 'ra warnañ gant liv ruz un A bras o vezañ ma krog anv Alanig gant un A.

Neuze e lakont ar vi da c'horin gant bravañ yar ar feurm : ur yar wenn.

Abaoe an deiz-se n'a ket mui Alanig da gousket a-raok mont da welout ar yar wenn o c'horin. Kerkent ha ma wel Alanig o tont-tre, e sav ar yar wenn evit diskouez dezhañ ar vi gant un A bras warnañ. Neuze ar yar a lak ar vi en-dro en e lec'h, dindan he flu tomm. Minc'hoarzhin a ra Alanig.



Alanig n'eo nemet pevar bloaz hag evel just n'eo ket gouest da lenn an deziadur ! Setu perak, bemdez, goude bezañ bet o welout ar vi, e lak ur c'hreunenn-ed en ur voest.

Hag e kont ar greun : unan, div, peder, c'hwec'h, nav ; ha gwech ebet n'eo gouest da vont betek ar penn hep goulenn digant e dad :

— Pet greunenn am eus, Tadig ?

Neuze e stagont da gontañ o-daou en-dro : unan, div, teir, peder, pemp, c'hwec'h, seizh, eizh, nav, dek, betek c'hwezek. Hag e dad a lavar :

— Pemp devezh c'hoazh, hag e tifluko da boñsin.

Alanig a gendalc'h eta da vont da welout ar yar.

An naontekvet deiz ez a Alanig, evel boaz, da welout ar yar wenn. Si-

wazh !

N'eus yar ebet ken ! na vi ebet !

Krog eo Alanig da ouelañ pa wel, a-daol-trumm, ar yar wenn.

Houmañ a zo e korn ar prad o skrabañ an douar evit ul labousig liv melen-aour.

Alanig a baouez da ouelañ, ha goustadik e tosta ouzh ar poñsin. Ar yar wenn ne ra van ebet, hag e chom al labousig aze, dispont.

Gant e vizied e flour Alanig ar voullig rous, ken flour ha ken tomm. — Din-me eo, eme Alanig, ha da zen ebet all !

Alanig, avat, n'en deus ket disoñjet komzoù e dad. Hag evit bezañ sur ez eo ur yarig e ro un anv dezhi diouzhtu. — « Marc'harid » e vo anv va foñsin, evel-se e vo dre ret ur yar.



Ganet eo « Marc'harid » en nevez-amzer ; hag e-keit-se e tesk penaos bezañ ur poñsin a-zoare.

Ne gemer ket mui ur vuzhugenn evit ur c'heotenn ha skrabañ a ra an douar hep kouezhañ war e benn a-dreñv.

N'eo ket mui spontet tamm ebet gant al loened bras. Ar saout a c'hell blejal, ar c'hezeg c'hwirinat, ar moc'h soroc'hal, « Marc'harid » ne dec'h ket kuit. Poan en deus al labousig memes tra o voazañ ouzh « hi-hañ » klemmus an azen.

A-hend-all n'en deus aon « Marc'harid » rak netra. Mont a ra da bigosat etre divesker al loened ha da lemman e veg ouzh o c'harnoù.

Met loen ebet ne gredfe ober poan da « Marc'harid », poñsin Alanig.

Gwech ha gwech-all e plij dezhañ lammat war gein ar c'honikled. Met ar re-mañ spontet-mik a red kuit betek penn pellañ ar prad. A-wechoù e laer digant an houldi o buzhug ruz. Evit gwir, gwall-zivergont ez eo « Marc'harid » e-keñver ar re gozh!

Ar gwazi nemetken ne vezont ket trubuilhet gantañ, pennoù fall a zo outo, ha gouest e vefent da waskañ anezhañ gant o figosoù.

— Re sot int evit ma 'z afen-me da c'hoari ganto, a soñj « Marc'harid ».

Setu an hañv dija. Ar poñsin en deus bremañ plu kaer, ruz-flamm ha lugernus. Ur yar vrav e vezo, sur mat.

Met tad Alanig a griz e dal pa wel anezhañ o redek er prad gant ar yer bihan all.



Un nozvezh, p'emañ Alanig en e wele, e klev e dad o lavarout d'e vamm :

— Me 'gav din ez eo « Marc'harid » ur c'hilhog, re vras ha re greñv eo evit bezañ ur bolez.

— Ne c'hellomp ket gouzout diouzhtu, eme ar vamm, gortozomp c'hoazh un tammig.

Alanig avat a zo teñval e benn.

Un nebeut amzer goude, e teu tad Alanig en ti gant un dousenn-vioù tomm c'hoazh, liv kaer dezho, hogozik gell.

— Setu kentañ vioù dozvet gant c'hoarezed « Marc'harid » hiziv, emezañ en ur sellout ouzh Alanig hag a zo aet ruz gant ar vezh, rak « Marc'harid » eo an hini nemeti n'he deus ket dozvet.

An noz-se, Alanig, trist e benn, a ouel dourek. Soñjal a ra : ma ne zozv ket « Marc'harid » ez aio va zad d'he gwerzhañ d'ar marc'had.

— Ne fell ket din, a soñj ar paotrig.

An deiz war-lerc'h e dad o c'houlonderiñ e baner war an daol a gont trizek vi.

« Marc'harid » he deus dozvet eta !

Ur yar eo, n'eus ket da dortal !

Deiz ar marc'had a dremen didrubuilh. Dozviñ a ra atav « Marc'harid » he vi.

Koulskoude Alanig a wel mat e sell e dad pizh ouzh « Marc'harid »

Gwir eo ez eus doareoù iskis ganti. C'hoant he deus da ren war he breudeur hag he c'hoarezed, ha pourmen a ra en o zouez evel pa vefe hi ar vestrez.



Tad Alanig, avat, a zo krog da evezhiañ pep tra, zoken e vab, rak, abaoe un nebeut deizioù e tiflip hemañ kuit bemdez war-dro pemp eur.

Da belec'h ez a ?

Fellout a ra d'e dad gouzout.

Un deiz eta, e teu en-dro eus ar park abretoc'h eget boaz, hag ez a da guzhat d'ar solier, e-lec'h m'emañ ar foenn. Ac'halese e wel mat tro-war-droioù an ti-feurm.

War-dro pemp eur e wel e vab o tont-tre e porzh ar yer.

— Setu da belec'h ez a va mab bemdez, emezañ outañ e-unan. Warc'hoazh e ouezin petra 'ra eno.

An noz-se, ez eüs c'hoazh trizek vi er baner.

« Marc'harid » eta a zo un dozverez vat.

An deiz war-lerc'h, d'enderv, setu tad Alanig e kraoù an deñved a zo stok ouzh klud ar yer. Gant beg e gontell e lamm ur skoulm brein en ur planken.

Dre an toull en deus graet e wel mat-tre Alanig o tont e porzh ar yer, o pignat gant ar skeul a gas da neizh ar yer, o kemer ur vi, o tiskenn gant evezh hag o lakaat ar vi dindan ar c'hlud e-lec'h m'emañ ar yer yaouank o tozviñ.

Dastumet ar vioù gant an tad ez eus c'hoazh trizek vi er baner.

An deiz war-lerc'h emañ an tad e porzh ar yer a-raok e vab. Gwallbinous ez eo Alanig pa zeu e-barzh, met ne ziskouez ket.

— N'eus forzh, a soñj, warc'hoazh ne vo ket tadig er gêr.



Diouzh an noz, en ti-feurm, e lavar e dad d'e vamm n'eus nemet daouzek vi hiziv.

« Marc'harid » n'eo ket un doz-verez vat.

Spontet eo ar paotrig hag an deiz war-lerc'h ez a d'ar red da glud ar yer.

Met e dad a zo eno dija.

Paour-kaezh Alanig !

Ken sammet eo e galon dija ma krog da ouelañ hag en em daol etre divrec'h e dad.

Neuze gant daeloù 'leizh e zaoulagad e c'houlenn digantañ:

— Ne gasi ket « Marc'harid » d'ar foar ? Te 'oar, dozviñ a ra a-wechoù memes tra !

An tad a vouse'hoarzh hag a dap Alanig etre e zivrec'h :

— Sot bihan ma 'z out, na ouel ket,

« Marc'harid » n'eo ket ur yar, met ur c'hilhog brav ha ken kreñv ma virin anezhañ. Hag ouzhpenn se, ditte ez eo !

Alanig a zo eurus o c'houzout e chomo « Marc'harid » gantañ, met trist eo memes tra o c'houzout n'eo ket ur yar ha ne zozvo morse vi ebet.

Hag e-pad pell-pell c'hoazh, pa 'z a e dad da zastum vioù an devezh, en deus Alanig ar spi da gavout unan dindan glud « Marc'harid ».

Evel just en deus plijadur, bep beure, pa glev « Marc'harid » o kanañ. — Met, emezañ, despetus eo ne deo ket ur yar.

Neuze, diouzh an noz en e wele, e lavar outañ e-unan e c'houlenno ur vi all evit e bemp bloaz.

Ur vi hag a roio ur yar ar wech-mañ.
Hag Alanig a zo sur eus kement-se.

EMBANNADURIOU

AL

LIAMM

Brest

2



LEVRIOU AR VUGALE